



Ai'ta Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

Monsieur Jean-Yves Le Drian

Conseil Régional de Bretagne
283, avenue du Général Patton CS
21101

Brest, le 30 janvier 2011

35 711 RENNES

Copie envoyée à :

Lena Louarn, vice-présidente en charge des langues de Bretagne

Mona Bras, conseillère régionale du groupe UDB-Les Verts

Bernadette Malgorn, conseillère régionale du groupe UMP

OBJET : Nouveau logo « Bretagne »

Monsieur le Président,

Comme vous le savez déjà, Ai' ta (*allez ! en breton*) est un collectif pour la défense et la promotion de la langue bretonne. Nous tenons à vous écrire aujourd'hui pour vous faire part de notre étonnement suite à l'opération de lancement de la nouvelle marque « Bretagne ». Nous pouvons comprendre votre volonté de « renforcer la puissance d'attractivité de la région » et d'« enrichir, diversifier, rajeunir et dynamiser l'image de la Bretagne ». Nous sommes toutefois fortement déçus que la langue bretonne ne trouve aucune place dans ce nouveau logo, alors même que vous aviez lancé en décembre 2004 un plan de sauvegarde et de promotion du breton, voté à l'unanimité.

Aujourd'hui plus que jamais, la langue bretonne a besoin d'être vue et affichée partout pour continuer à se développer. Ainsi le font de plus en plus de collectivités en choisissant un logo en breton ou bilingue. Comment imaginer alors que le Conseil Régional ne donne pas l'exemple ? La langue bretonne n'est-elle pas assez moderne pour pouvoir illustrer une Bretagne jeune et dynamique ? Nous croyons au contraire que c'est avant tout notre langue et notre culture qui font de la Bretagne ce territoire si riche, à la fois fortement enraciné et ouvert sur le monde. Et que les jeunes générations sont de plus en plus attachées à ces éléments de notre identité. C'est pourquoi nous vous demandons de donner toute sa place à notre langue dans ce nouveau logo, ainsi que sur son site de promotion marque-bretagne.fr, qui, pour l'instant, n'est disponible qu'en langue française.

Souhaitant connaître votre position sur ce sujet, veuillez agréer, Monsieur le Président, nos sincères salutations.

Dewi Siberil, porte-parole d'Ai 'ta !

Milin Kerbeskont 22 110 ROSTRENN

ai.ta.kreiz.breizh@gmail.com



Ai'ta Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

Aotrou Jean-Yves Le Drian

Kuzul rannvro Breizh
283, bali ar Jeneral Patton
CS 21101

Brest, d'an 28 a viz Genver 2011

35 711 ROAZHON

Kaset da :

Lena Louarn, bez-prezidantez e-karg deus ar yezhoù
Mona Bras, kuzulierez strollad UDB-Ar Re C'hlas
Bernadette Malgorn, kuzulierez strollad UMP

DANVEZ : AROUEZ NEVEZ BREIZH

Aotrou Prezidant,

Evel ma ouzit dija e stourm hor strollad Ai'ta evit difenn ha broudañ ar brezhoneg. Fellout a ra deomp skrivañ deoc'h evit lâret deoc'h pegen souezhet omp bet lakaet da geñver taol lañs arouez nevez « Bretagne ». Kompren a c'hallomp ober e fell deoc'h « kreñvaat nerzh desachañ ar rannvro » ha « reiñ ur skeudenn disheñvel, pinvidikoc'h, yaouankoc'h, nerzhusoc'h deus Breizh ». Dipitet-bras omp bet memes tra o welet ne oa tamm brezhoneg ebet en arouez-se, pa oa bet roet lañs gant ho skipailh a-unvouezh d'ur steuñv evit difenn ha broudañ ar brezhoneg e Kerzu 2004.

Muioc'h evit biskoazh he deus ezhomm hor yezh bezañ gwelet ha lakaet war-wel. Hep an dra-mañ ne c'hallo ket chom bev ha mont war-raok. Se 'zo kaoz 'zo bet choazet gant meur a strollegezh arouezioù brezhonek peotramant en div yezh. Peseurt mod intent ne vefe ket ar C'huzul Rannvro ur skwer d'an holl war an dachenn-mañ ? Daoust ha n'eo ket modern a-walc'h hor yezh evit skeudennaouiñ ur vro yaouank ha nerzhus evel hon hini ? Krediñ a reomp eo hor yezh hag hor sevenadur da gentañ penn o deus stummet skeudenn Breizh a-vremañ; int-i a ra pinvidigezh hon tammig douar hag an dud a vev warnañ, gwriennet don ha digor war ar bed war un dro. Hag ar re yaouank dreist ar re all a zo stag-mat ouzh an tammoù-se deus hon identelezh. Abalamour da se e c'houlennomp ganeoc'h ma vefe roet e blas d'ar brezhoneg en arouez-se, koulz ha war e lec'hienn-vrudañ marque-bretagne.fr, hag a zo e galleg penn da benn betek-henn.

Laouen-tre e vefemp o c'houzout ho soñj diwar-benn ar sujedoù-mañ. Da c'hortoz ho respont, resevit, Aotrou Prezidant, hor gwellañ gourc'hemenoù.

Dewi Siberil, mouezh aotreet Ai 'ta !
Milin Kerbeskont 22 110 ROSTRENN
ai.ta.kreiz.breizh@gmail.com